

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

60. DISPIGNER HE ARC'HANT

(Follenn 194)

Na ma m'be me kant skoet a monnet en foll
 Mont dar davern gate hag ho dispign oll.

Na pa deuot dar ger da laret dar vreg
 foetet eo tout an arc'hant na neus chomet goenek

- Nag evid an dra ze na petra ra se
 C'houi o poa hi gonezet hag a reï adare.

Na savit-tu aman deud da tall an tan
 Da fumi eur c'horniad butun o hortos ho koan.

Diviskit ho poutou, kid hen ho koëlle
 Krogit en ma daouzornik a va chachit ive.

hag antronos vintin evel ma zeo savet
 Da furchall he c'hodellou eo e neum laket.

Mar ioul goennek eno assur nen deus chomet
 Petra meus me dober oc'h enn den ken méchant.
 Goude beza dispignet eur sort dornad arc'hant.

Reï bazadou dezan keit hag he zillad
 he telli da derri he c'houzoug en eun toul mengleuz
 benag.

VVVVVVVV

Jannet Puill, 14 janv. 1851

VVVVVVVVVV